

KANTIKOU NEDELEG

"SONIT LAOUEN"

Refrain:


1. Sonit laouen, sonit trompilhou,
Au Fils Muzikou, de de Marie.
Chan Efez ar baradoz
Setu ganete kreiz an noz
Eur bugelig, heñ mestr an nenvou;
Sonit laouen, sonit trompilhou,
Gloria Muzikou, Gloria Muzikou.

Elez ar baradoz:

1. Au loin la vallée est endormie;
Vers an Elez, ni gant levez,
Seuls les karantez dans la prairie
Kanomp d'ar bugelig.
Diskennet eo en eur c'hraouig
Eus lein an nenv, leun a vadelez.
'Vel an Efez, ni tremblant dans l'ombre,
Sur l'air de l'éther les yeus (bis)
3. P'en deus prizet dont eus ken uhel
Berges Ken izel, soyez sans crainte,
Dezan hon holl galon!
Beza 'vo hor gwella mignon,
Betek war ar groaz vidomp mervel.
P'en deus prizet le Roi des anges,
Sous les traits si doux d'un enfant;
Hastit buan, hag it pastored,
Rouaned, Dieu vivant! (bis)

Da welet ho Salver!

2. Kasit d'ezan caned dister
Ha tenezorrou brao an Arabed
Hastit buan
Echo même au paradis:



5. D'ar bugel koant, brema hor Roue,
 Hon Doue,
 Meuleudi ha bennoz!
 En eürusted ar baradoz,
 Eun deiz gantan 'vimp korf hag ene.
 D'ar bugel koant

~~~~~

"EN EUR C'HRAOU"

Diskan: En eur c'hraou, e-mesk al loaned,  
 Krouer ha mestr an nenv zo diskennet;  
 En eur c'hraou, e-mesk al loaned,  
 Eman ganet Salver ar bed.

1. Setu heñ war eun dornad plouz,  
 Gant e gorfig paour mailhurennet;  
 Setu heñ war eun dornad plouz,  
 Ne weler krouadur ken dous.
2. E kreiz an noz, klevout a reer  
 Eur ganaouenn vrag gant an Eled;  
 E kreiz an noz, klevout a reer  
 Kan an Eled a gêr da gêr.
3. An Eled o deus dihunet  
 An diwallerien o oa kousket;  
 An Eled o deus dihunet  
 Ar vesaerien hag o denved.

4. Holl, hag en eur redek founnus,  
 Ez int deut da welet ar Mabig;  
 Holl, hag en eur redek founnus,  
 'Deus roet o madou da Jezuz.

5. Deomp 'ta ivez, deomp, Bretoned,  
 Da welet ar Mabig zo ganet;  
 Deomp 'ta ivez, deomp, Bretoned,  
 D'en em ginnig da Vestr ar bed.

6. Jezuz, ho kristenien vreton  
 A zeu holl d'hoc'h adori gant gred;  
 Jezuz, ho kristenien vreton  
 Laouen a ro d'eoc'h o c'halon.

7. Kemerit-hi mar plij ganeoc'h,  
 Daoust m'eo hi paour ha yen meurbet;  
 Kemerit-hi mar plij ganeoc'h,  
 'Vit ma teuy da veza kaeroc'h.

~~~~~

"SETU NEDELEG!"

1. Setu Nedeleg! En eur c'hraouig dister,
'Welomp war ar plouz eur bugelig tener
Eun Doue karantezus,
Hor breur ar Mabig Jezuz.
Ar Werc'hez benniget;
He c'halon entanet,
A lez da bara he sell
Warzu he bugel;
Ha dre holl en nenvou
Dason kaer ar c'hantikou.

Diskan:

- 1) An Elez 'en nenv o deus kanet laouen!
Kemeromp ni holl perz en o c'hanaouenn!
Noel! Noel! Kanomp holl Noel!
Noel! Noel! Kanomp holl Noel!

- 2) Burzud a garantez,
Mister a drugarez:
Doue 'n em c'hraet den,
'Vidomp pebez Salver!
Ennan nemet douster!
Holl d'ezan hepken.

2. Elez e pep tu, kaer 'vel ar sklerijenn,
A nije en noz, splann en denvalijenn;
Da Zoue e kasent gloar,
D'an dud peoc'h war an douar!
Hag o klevet o c'han,
Ar vesaerien buan
Da graou ar Mabig Jezuz
'Zired eürus.

Hirio, ni eveldo
Kanomp lirzin e hano!

3. Nag eürus omp-ni! Hon Doue, hor Zalver
A jom breman c'hoaz ganomp war an aoter:
Dindan spesou ar bara,
E chom evit hor maga,
Hag an Elez santel,
'Vel gwechall en e gavel,
Hen anzao evit Roue,
Evit o Doue!
Ni gant joa, deiz ha noz,
Kanomp d'ezan mil bennoz!

"E KREIZ AN NOZ"

1. E kreiz an noz,
Petra eo ar sklerijenn,
Trec'h war an denvalijenn,
War-du beg ar roz?

Diskan: Na spontit ket,
Rak an Eled
A zigas deoc'h kelou mat
'Vit ho laouenât;
Redit founnus
Davet Jezuz,
Evidoc'h ganet hirio
'N eur c'hraou 'barz eur c'heo.

2. Ar bugelig
Mailhuret war eun tamm plouz
Eo ho Salver deñt didrouz
Aman kichenik.

3. An Elez gwenn
'Gan meuleudi da Zoue,
Mestr an nenv hag o Roue,
'Tont en hor c'hichen.

4. Gloar da Zoue
E penn pella an nenvou,
Ha peoc'h evidoc'h, tudou
Mat a volonte!

5. Bugel-Doue,
Astennet war plouz 'vidomp,
De/oc'h-c'hui e kinnigomp
Hor c'horf, hon ene.

~~~~~

## "GLOIRE AU SAUVEUR DU MONDE!"

### Refrain:

Gloire au Sauveur de l'univers,  
Au Fils de Dieu né de Marie.  
Chantons l'hymne bénie  
Qui réjouit les airs  
Et d'un flot d'harmonie  
Caressa son berceau:  
Gloria in excelsis Deo.

1. Au loin la ville est endormie;  
Sans bruit tout repose alentour,  
Seuls les bergers dans la prairie  
Gardent leur troupeau tour à tour,  
Quand tout à coup dans la nuit sombre  
Apparaît un ange des cieux.  
Et les bergers, tremblant dans l'ombre,  
Sur lui n'osent jeter les yeux. (bis)

2. Bergers, dit-il, soyez sans crainte,  
Je viens réjouir votre coeur.  
Oui, près de vous la Vierge sainte  
A donné le jour au Sauveur.  
Vous le verrez, le Roi des anges,  
Sous les traits si doux d'un enfant;  
Dans cette crèche et sous ces langes,  
Reconnaissez le Dieu vivant. (bis)

3. Soudain des sphères angéliques  
Descend sur les pâtres ravis  
Le plus suave des cantiques,  
Echo même du paradis:

Gloire au Très-Haut, Paix sur la terre  
Aux coeurs de bonne volonté.  
Le Christ Jésus offre à son Père  
La grâce de l'humanité. (bis)

4. Suivant la céleste harmonie  
Et la sainte ardeur de leur foi,  
Ils vont à la grotte bénie,  
L'âme pleine d'un doux émoi,  
Contempler dans la pauvre étable  
Marie et Joseph à genoux,  
Puis adorent l'Enfant aimable,  
Le Verbe fait homme pour nous. (bis)

5. Chrétiens, en ce jour d'allégresse,  
Près des anges et des pasteurs,  
Allons lui faire avec tendresse  
Le don généreux de nos coeurs.  
Et que l'écho de nos montagnes  
Au loin porte nos cris joyeux,  
Et que l'airain de nos campagnes  
Le mêle au cantique des cieux. (bis)

~~~~~